

192

[Au fol° 333 recto, seulement le titre :

Ar C'hakous.

(333 recto)

Ar C'hakous.

(333 verso)

Deus ar pardon en 'en donet  
 En t'arlik Kraf<sup>ant</sup> meus rankontret,

A gantan eur jupen voulous,  
 Ne wuiet ket a wa Kakous ;

hak eur tok Kastor war he ben,  
 Ne wuiet ket a re Kerden.

hak e vont o c'houlou ouin  
 — Plac'hik c'hwi ventur dimii ?

— Men de ket war ar Kroas hentcho  
 E ve groët an dimezio .

ret eo Rog bean-assembly dimeet  
~~eo ret~~ eur t'arlik e (1) n'eum darampret.

Men de ket war ar Kroas hentcho,  
 E ve groët an dimezio .

En eur ilis pe neur porchet,  
 Dirag ar Sent, ar Sentezet.

(334 verso)

Lec'h ma ve eur Belek pe daou  
 Kerent an daou tu wit testaou.

Beo e ma mam, beo e ma zad  
 Goulen ho assant a ve mad.

---

(1). — e est ajout.

Ma zadek paour a levere  
D'an tortik koant vel m'en kleve :

— N'en deo ket dan disvroedi  
A rin ma merc'h et da eureujin .

Med da unan deus hon c'hanton  
hag a verzo den a fesson .

— Me zo eur map a ligne vad  
Deus koste ma mam a ma dad .

Roet din ho merc'h dierc'hen,  
Me meus awallach a voien ;

(335 verso)

Triwarc'h pillik e zo em zi  
ha bara michen da zibri .

Pa voan tost d'ar kakouziri,  
ha me klevet trous ar c'hiri ;

ha me hag a c'houlen outan :  
— a ti eur kakous zo aman ?

Ag hen ak o tristreïn (1) ouin,  
En en rein fassado din :

— Me ho tisko minorez vad,  
d'ober eur c'hakous deus ma zad .

Pa d'his c'hentan dar gakouziri,  
Na wuiet ket trei ar c'hiri ;

Breman mo zo hak o distro  
Kouls a merc'h kakous zo er vro .

(336 verso)

Breman me war trei ar c'hiri,  
Da ober chaplou d'al listri .

(1). - Ms.: tristreïn ; lire : tistreïn .

194

Breman me ve en tal aq tan,  
A vezur ma c'hakous bihan;

ha toman ra outan ma c'halon,  
Vel pa vije mab d'eur Baron.

He chanss zo lakat da bep ini;  
Rabet e nem glem deus ma hini.

}

[trad. franç. de cette pièce,  
par Penguern,  
aux fol<sup>s</sup>: 334-336 rectos.]